

A-raok lenn 1

Ur biz troc’het-krenn, daou zevezh en ospital... rankout chom er gêr. Ha setu ar vag o vont war-raok dindan avelioù disuj. Ha me er gêr... ouzh ma zaol, da beurlipat ur skrid boulc’het bloaz a oa : *Micha Riou*.

D’ar 17 a viz Meurzh 2020 : ur barrad avel a-dreuz ar bed, o tont eus ar sav-heol a lârer. Urzh a roer deomp da chom bac’het er gêr abalamour d’ur c’hleñved-red. Bac’het e oan dija en ur mod.

Setu taolet gouelioù ar vag d’an traoñ, tamm mor-avel. Skodeget gant ar c’heloù evel ar re all, frailhet melezour hon nerzh a soñjemp divuzul ; c’hoant em eus bet – evel ar re all – derc’hel da gontañ kaoz a-bell gant an dud tost da’m c’halon. Tarzhañ a rae ar broñsoù er gwez dija.

Ha graet ma soñj ganin : enrollañ a rin istor *Micha Riou*, emezon. Unnek rann a vo ha “skignet” e vint bep abardaez-noz, da 7 eur, dre internet. Aze ’mañ ma soñj. Evit piv ? Evit ma breudeur, evit ma

bugale, un dek bennak a dud. N'ouzon ket gant pehini ac'hanomp, gant ma mab Brieg pe ganin zo deut da soñj gwiskañ an istor gant trouz tram Brest, mouezhioù tud... ha sonerezh : graet e vo a-drugarez 'ta da skoazell ma mab ha da *Scarlett Solo*, ur voestig da enrollañ. Setu lañset ganeomp “ar stirad (!) Micha Riou” d'an 29 a viz Meurzh.

'Mañ ar vag e-kreiz ar mor, he gouelioù d'an traoñ ; met mouezhioù, filmigoù, avanturioù munut, a glever tu-pe-du war rouedad ar re o deus aes.

Yec'hed hon breur Gwenael, a reomp Gwen anezhañ, 'oa o c'hoari da fall, un nebeud mizioù 'oa. Ha douetañs gwall-geloù da zont. E-kreiz miz Meurzh e voe lakaet splann ar c'hrign-bev skoachet a-dreñv al lounez dehoù. Gantañ e voe roet deomp ar c'heloù dre vail. Heñvel e donkadur ouzh hini Micha ?! Ar vuhez tremenet o kouezhañ en he foull, momeder ebet d'an amzer da zont ! Mantret e voen ha mezhek zoken gant an “degouezh-faltazi” diwar ma ijin hag e blanedenn dezhañ. Kavout a raen diaes-daonet e vefe an istor-mañ hag e hini oc'h ober bizig-krog ! Skrivet em boa dezhañ ma zrubuilh.

Evit lâret ar wirionez, 'benn 'm boa klevet keloù kleñved Gwen em boa graet ma soñj cheñch trosperec Micha : deut 'oa startijenn dezhi, un ivinad spi estlammus ha diasur enni : dihentet 'oan bet gant Gwen, gant ar gwall-gleñved a oa skoet gantañ. Ne oan ket evit ober mod all. Harzañ ouzh

ur wallblanedenn da gregiñ e korf Micha hag e hini ma breur. Klask toull-avel an esperañs.

Frealziñ Micha a glask ober Tual, an dudenn all, hep goût ober hag ar skrivour a zo ac'hanon en doa klasket ober kemend-all. Hep goût dezhi he doa lodet Micha hec'h enkreiz gant ma breur Gwen, bed ar faltazi ha bed buhez Mab-den ouzh ar memes taol e ostaleri an dicheañs.

Ne oa ket trawalc'h din. Ret e oa din skrivañ un istor evitañ da vat ha n'eo ket dre zegouezh : mont da skriver-pareour evit Gwen, ober ur burzhud ! Diwar-se eil istor al levr-mañ : *Gwastell ar Rouaned...* istor ur gwir pareour, ur Super-pareour ! Ur mor a spi ennañ !

Un istor da lodañ gant ma breur nemetken e oa da gentañ-penn.

Micha Riou

(1993- ?)

1

Tapet 'oa bet ul labour nevez gant Tual Appere e porzh koñvers Brest, ur c'hwec'h miz bennak 'oa. Ur paotr mistr, blev rodellek ha muzelloù tanav dezhañ ; abalamour da se ne oa ket ur gwall glabouser, piv 'oar ? Kas-digas marc'hadourezh gant ur *Fenwick* 'oa e labour-pemdez en ur c'harrdi bras : eno e veze dastumet ha renket boestoù-mir. Ur vicher diaes n'eo ket met war evezh e ranker bez' dalc'hmat. Abalamour d'ar pounner m'eo ar paletennoù e vez brall-divrall ar gargad pa saver uhel forc'h ar *Fenwick* da bevar metr, ken e chourrik war e ziv rod dirak, e-giz ul loen imoret. Stummet e oa bet Tual war ar vicher a-drugarez da Bol Implij hag eñ dilabour ur c'hrogad 'oa. Klask

'oa war bleinerien seurt kirri, a lârer. Ha gwir 'oa : kinniget 'oa bet dezhañ meur a bost-labour en ur ober eizhtez.

Tri e oant o labourat er c'harrdi bras dizanv war vord straed ar senedour Pichon nepell diouzh ar stal *Locoutils*. A bep tu d'ar savadur zo burevioù nevez savet. Meskailhez c'hwezh a sav d'o fronelloù : c'hwezh fuel, pesked, dour-mor ha fritez a-wechoù.

Didrouz o mont-dont gant o *Fenwick*, kefluskerioù tredan dindan o c'horf dir. Miz 'oa e labourer c'hoazh Jacky gante, hag eñ en ur burevig, ul lochki, hep tommerezh na prenestr. Gantañ e veze urzhiet hag aozet labour an tri bleiner. Taolennoù-labour a oa ouzh ar voger fas d'e vurev ha paperet en doa ar mogerioù all gant skritelloù, warne chas hir o dent pe berr o blev ken e oa bet graet Frolik anezhañ, diwar anv ar boued chas.

Evel-just e veze pres alies : ha grozmoz gant bleinerien ar c'hirri-samm, paotred druz o barv ha rust o mouezh. Kirri-samm dizanv eus a bep seurt broioù ! Evit gwir, ne ouie ket Tual re vat petra a veze o kas-digas e trepasioù hir ar c'harrdi. Lufus e oa ar boestoù-mir war ar palettennoù en damsklêrijenn. Anv ebet dezhe, etiketenn ebet war o gorre. Un niverenn war c'holoenn blastik ar baletenn, tra ken. Implijet e oa Tual gant ar CELAB, bet o ren war marc'had al legumaj dre Europa ha betek Rusia hag Hungaria diouzh ma vez lâret. Abaoe un nebeud bloavezhioù e oa bet serret pe gwerzhet meur a stal

gante. Ha skarzhet micherourien ha micherourezed Boutet-Nicolas e Rosporden, e Karaez hag e lec'h all ! Nag eñ nag ar re all ne ouient eus pelec'h na da belec'h ez ae ar c'hargadoù-se.

— Gounit da damm boued diwar da labour war ur *Fenwick* zo trawalc'h dit, 'teus ket ezhomm goût muioc'h. Na te na me n'eo dav deomp goût muioc'h ; ne vo respont ebet a-berzh Re ar penn all, forzh penaos, 'oa bet lâret dezhañ gant Frolik, an devezh ma oa krog ganti.

Re ar penn all eo hor mistri. Daou benn a zo da gement tra ! a blije dezhañ lâret gant ur c'hruz d'e zivskoaz.

D'ur Merc'her d'abardaez e voe ur gerig war skramm pellgomz-godell Frolik... da lâret dezhañ... e vefe klozet e loch-ki. Eizhtez war-lerc'h e tegouezhas ur skipailhad micherourien da staliañ meur a gamera e penn pep trepas : micherourien vut. Taolet e voe kuit an urzhiataer kozh, ar mekanik kafe, kador-burev Frolik, e chas war baper. Ha Frolik... war zigarez an oad. Diwar urzh Re ar penn all. Staliet ur voestig zu, ur spered konektet gant ul loarenn bennak en ec'honder.

Hag an deiz war-lerc'h vintin e oa erruet un oto e toull dor ar c'harri. Goude un tamm prezegenn distagellet-kaer, en doa roet an aotrou Alexandre Vivaret, un denig disliv e zremm – isrener rann Breizh ar CELAB – pep a dokarn d'an tri blenier Fenwick.

— Hemañ a lâro deoc’h war beseurt stalafenn renkañ ar paletennoù dre ma tegouezho ar c’hirrisamm, eme ar paotr, e selloù paret war ar voestig zu. Direbech eo : daou zevezh a-raok e teuio ar c’heloù betek ennoc’h. Gouest eo zoken da respont da c’houlennoù zo, a lâras en ur ober ur sell moumoun outi hag ouzh he lutigoù ruz... Mousc’hoarzh skuizh an trec’h war e vuzelloù. Ma vez un tamm diaezamant, SMSit deomp – *we must stay in touch* – emezañ.

Gwelet a reas daoulagad dispourbellet an tri faotr.

— Chomomp luget paotred... emezañ... chomomp luget.

Chomet e oa boemet an tri bleiner. Aet e oa an aotrou Vivaret war e giz, e-unanik, e zivesker treut o flikata en e vragoù skañv. Hir e oa trepas ar c’harrdi. Re dreut ar paotr evit gwiskañ dilhad ken kran o doa soñjet ar vicherourien. Sanket en doa Frolik e zaouarn serret en e c’hodelloù. Daou zevezh warlerc’h e voe kinniget dezhañ mont da labourat da Orléans :

— N’in ket di ! ha d’ober peseurt labour ? Tribledie ! en doa huchet deomp.

Diwar neuze e oa aet da ruzañ e kêr : mont a rae eus an eil ostaleri d’eben hag e foete e dammig peadra kammed-ha-kammed. Huanad ebet, ur vilienn yen a oa oc’h ober hec’h annez en e gorzailhenn.

Tan de’i avat gant an tri bleiner hag o labour

mod nevez, sav-kein ebet ken evite ha skouarnelloù kaozeüs da vestr. Ne oa ket da choaz met se 'oa un tammig diouzh doare Tual Appere, marteze.

Feurmet e oa bet eta gant Tual ur ranndi tostik da liorz Kennedy, d'an ti-gar hag e vogerioù suilhet. Evit ar wech tout e oa bet plijet gant ar c'harter-se, gwall-vrudet ur poent 'oa bet : gavrioù glas ha melen ar porzh a wele eus prenestr e gambr. Dasson blokadoù houarn ar c'hempenn bagoù o vont a-stok a blije dezhañ klevet. Eus e brenestr, en trede estaj, dreist bali Dajot, e chome da sellet ouzh ar c'hamionoù o vont, o tont, par da dammoù c'hoarielloù *Dinky Toys*. Sellet ouzh birvilh ar porzh, fraoñvadeg dizehan ar c'hirri 'oa un dudi dezhañ koulz hag ar rodennoù gouloù glas pe orañjez, takadoù labour e islonk an noz : ur martolod moredet eo ar porzh, dihuniñ a ra gant droug-blev ha safflik klouar aezhenn ar sav-heol.

Tour roz an Amerikaned a wele war e zorn dehoù pa rae un astenn d'e c'houzoug en ur zigoriñ ar prenestr. Abaoe m'en doa lennet Tual istor an tour e *Sillages*, kelaouenn kêr, e rae e salud dezhañ gant doujañs. Savet e oa bet an tour gant mein gris an Aber-Ildut e 1932 war un dachenn perc'hennet gant ar Stadoù-Unanet, da enoriñ soudarded amerikan ha gall ar Brezel bras. Ha distrujet gant an Nazied e-kerzh an Eil Brezel-bed d'ar 4 a viz Gouere 1941, deiz gouel broadel ar Stadoù-Unanet ! Er bloavezh 58 e voe adsavet gant greunvaen roz Ploumanac'h :

rik diouzh patrom an tour kozh, da ankouaat da vat darvoudoù ar brezel.

E lein ar skalier, 113 pazenn dezhañ, tregont metr uheloc'h zo miret ul lizher bet skrivet gant ar prezidant Eisenhower !

« En Enor d'ar re o deus aberzhet o buhez war vor. Gant ma vimp gouest da stourm evit ar frankiz hag ar peoc'h en amzer da zont, emañ pobl Bro-Frañs ha Stadoù-Unanet an Amerik ken stag outo. »

Ur golo-lizher graet gant mein eo an tour roz ! Lentik hag uvel e tremene Tual e-biou dezhañ pa 'z ae d'ober un dro-vale etrezek tour Vauban : bec'h an istor war choug ar Vrestiz ? Mein benerezh Ploumanac'h a oa ken flour ha lufrus ha maen-bez e eontr Jakez e bered Kerfautras.

Bras e oa ar sal ha ledan kambr e ranndi. Er c'horn pellañ e oa un tamm kegin, diskramailh a-walc'h. Diouzh e zoare e oa. Ur c'hempenn marc'had-mat 'oa bet graet d'ar sal-dour gant ar perc'henn. Livet en doa Tual ar paper-moger ma weled a-dreuz dezhañ tres bleunioù bras diouzh giz ar bloavezhioù 70. Atav ez ae e c'hoant gant ranndioù diskempenn ; adlivañ ar mogerioù gant liv marc'had-mat a rae, diouzh faltazi restachoù ar stalioù-diskount. Gant ar c'hoant ober gant livioù na blijent ket d'ar re all ? Ur mod e oa evitañ da adlañsiñ e vuhez marteze, da reiñ ul lusk nevez d'an deizioù ordinal.